

KANNAOIG Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 80 Meurzh - Ebrel 2013 Priz : 3€

A-enep “Sevenadur an Ankoù”...

Sevel dimp-ni hor sevenadur el ledenez-mañ

Pellik 'zo dija e lavare Hon Tad santel ar Pab Benead XVI peseurt emzalc'h hon eus da gaout dirak ar sevenadur-se eus an Ankoù. Aliañ a rae dimp enebañ war dachenn ar c'hoari politikel evel laiked. Breutaat eta. Komz a rae ivez eus ar ret maz eo sevel un “Enep-sevenadur”... evel Alain Soral (hemañ n'eo ket enep-kristen, pell ac'hano, notit mat, daoust ma oa c'hoazh komunour n'eus ket gwall bell 'zo). Ar meizad-se a zo meret a-zevri ivez gant Rémy Fontaine, eus ar pemdezieg “Présent”, pa gomz eus “Sevenadur an disivoudiñ” en e levr diwezhañ “*Dindan sin Antigône*”. E metou ar gatoliked c'hall, hini an hengounelourion-anterin ez resis, ez eur krog eta da soñjal da vat e ranker disteurel ar Riezstad c'hall evel m'emañ. Cheñch bro a rankont, emezo. N'eo ket mui o bro, a soñjont. Charles Rosiers a skriv da skouer : “*Emaomp o chom en ur vro c'hwec'hkogn n'he deus netra da welout gant Frañs*”, da lavarout eo ar Frañs kristen “a viskoazh”, hini Sant Loeiz ha Janed Ark. Kavout a ra dimp ni ivez n'eo ket ar Riezstad c'hall hor bro dimp-ni, hag evit an hevelep abegoù a-benn ar fin : Ar Frañs nevez, merc'h ar Sklerijennoù, a zistaolomp peogwir ez eo enebet-krenn ha dre anien ouzh ar feiz kristen, enebet ouzh hor Breizh a-viskoazh, disoc'h un enstuzidigezh dispar eus ar feiz el

ledenez-mañ. Ret eo domp sevel a-nevez ni ivez, evel ar C'hallaoued gatolik, un “enep-sevenadur” d'en em dennañ diouzh krabanoù sevenadur an Ankoù, daoust ma chomomp gennet ha bac'het-mat er C'hwec'hkogn.

Kement-se n'eo ket soñj an darn vras eus an Emsav siwazh, m'en goar. Mont a reont bepred gant red an avel war boent “Sevenadur an Ankoù”. Goulc'han Kervella da skouer, e-barzh

“Ya !” a skrive nevez 'zo ur pennad a ziskoueze ur beleg ijinet gantañ, heñvelrevad, o vont da ziskuliañ e dech ouzh ar gador prezeg da heul embannadur “Pedenn ar familhoù” ar c'hardinal Jean Vingt-Trois da geñver gouel an Hanter-Eost. Ur bedenn dizrouk na ra nemet embann Feiz an

Iliz a viskoazh. Aet on pase-skuizh gant ar rummad-se a zo war-dro 60 pe 65 bloaz bremañ, dek vloaz koshoc'h egedon, hag a gendalc'h da embann mennozhioù frankizelour abaoe Mae 1968. Gwelout a reomp e pe stad eo bet kaset ganto ar gevredigezh a zo en o dalc'h abaoe keit-se a amzer, ha pergen he c'hellig-diazez, an Tiegezh. D'e ziskar o deus “gounezet” an hilastalerezh, an torr-dimeziñ a dorr bremañ an hanter eus an tiegezhioù, an diforc'hañ-bugale (10.000 bep bloaz e Breizh da vihanañ)... ha bremañ e fell dezho diskar ensavadur koshañ ar bed, ar Briedelezh (gwall glañv er pleustr pa stader e vez ganet nebeutoc'h eget an hanter eus



ar vugale e stern ar Briedelezh...), ha lezel bugale da vezañ advabet gant pared heñvel-rev, da lavarout eo nac'h ar gwir naturel en deus pep bugel, ha pa vefe advabet, da anavezout karantez ur vamm hag un tad war-un-dro e stern an tiegezh, ur stern-vuhez naturel maz eus unan (lenn pennad kentañ ar Bibl e levr ar C'heneliezh) en holl sevenadurezhioù. Souezhet e vezan o welout pegen berr, pegen skort, eo arguzennerezh ar gronnad bihan-se a aktivisted a c'houlenn kaout bugale met a fell dezho dimeziñ gant unan na c'hellint ket, dre ret, kaout bugale ganto, nemet e vefe asantet genel a youl-gaer bugale... dilignez !!!

Penaos mont er-maez, er pleustr, diouzh sevenadur an Ankoù ? Sed aze ur goulenn diaes hogen mat eo merkañ en deus an Emsav un tamm skiant prenet war-se p'emañ o stourm ouzh ar sevenadur gall abaoe keit-all war hol ledenez. Savet hon eus rouedadoù a bep seurt : tiez-embann ha kentelioù-noz da gentañ, skolioù, skolajoù, skingomzoù, embregerezhioù zoken... Kalz ac'hanomp a zo tuet d'an amvevadouriezh, d'an emrenerezh e par ar boued, an energiezh... Ha birvidik eo bed ar c'hevredigezhioù 1901 en hor bro.

Kalz eus tud an Emsav, daoust pegen pell ez int da soñjal evel an Iliz, a zo braouac'het o welout ar c'hemmoù a c'hoarvez er mareoù-mañ hag abaoe 50 vloaz e gwirionez : displeberet eo kement al lezennoù m'int deuet kontrol-mik d'ar skiant-vat. Anv ez eus da "reiñ ar gwir da vervel" evit pikañ ar re gozh, anv ez eus da gas ar vugale d'ar skol abretoc'h c'hoazh evit o zennañ diouzh levezon o zud hag evit kas ar maouezed d'al labour hep daleañ... Emaint oc'h ober arnodoù war ar c'hrouelloù-tud, graet e vez bugale dre PMA-GPA, babiged OGM kwa me 'laka ! Breskoc'h eo o yec'hed eget hini ar vugale a vez ganet hervez an natur, avat. N'eo ket souezh ! Emaomp degouezhet penn-da-benn gant "Enez ar Vertuz", romant Youenn Olier.

Deuet eo an deiz, hiziv emañ, gant al luskad bras en deus savet e gein a-enep lezenn Taubira hag an "Dispac'h kevredigezhel" emañ o skeudenniñ, hervez komzoù ar vavdiernez hec'h-unan, ma ranko pep hini dibab etre sevenadur an Ankoù ha sevenadur ar Vuhez, ar Peoc'h, ar C'henemglev, ar Genskoazell, hag all hag all, talvoudoù na c'hellont ket chom kleuz ha faos evel bremañ re alies. N'eo ket diwar greskiñ tailhoù ur riezstad e vezint lakaet da dalvezout, nann. Diwar oberoù pep hini an hini e vint, re pep den gwitibunan el lec'h m'emañ.

En ur c'hroazhent emamp. Gwir eo e soñj da bep hini ez omp ur bihan-niver. N'eo ket gwir ! Ar muiañ niver ez omp met kalemarc'het ez omp en ur sevenadur a zo da gas d'ar blotoù. Touellet omp gant ar meziennoù hogen gant ar genrouedad e c'heller ober hepto. Echu eo da vat gant diktaturiezh ar skinwel ha Ou(e)st-France. Ha gant-se e rankomp profitañ eus benveg ar yezh evit sevel el ledenez-mañ hor sevenadur dimp-ni, unan hoalus, troet ouzh ar gaerded, ouzh ar mad, ouzh ar vertuz, ar pardon, al labour, ar strivoù, an nerzh, an avisted, ar gwir doujañs d'an dud, ar relijion. Ar sevenadur-se a oa anezhi nevez 'zo c'hoazh dre amañ : diskaret eo bet gant ar sevenadur arnevez, hini ar Sklerijennoù ha "Gwirioù Mab-den Dizoue", met en hon dalc'h emañ : n'eus ken 'met kenderc'hel an erv bouc'het e linenn istorel hor bro, kenderc'hel gant ar brosesion vras bet kroget gant hor sent kozh ha bet kendalc'het betek nevezik 'zo, a-raok dour-beuz ar sevenadur 1789 en em gavet en hor bro e tro 1918, ha brizhsevenadur 68 da heul... War an hent e kavimp doareoù efedus da stourm. Cheñch yezh e Breizh a zo unan anezho a c'hell bezañ efedus maz eo evit mont e-barzh ur gevredigezh all. Ket unan brizh-trevezet ouzh hini Bariz.

T. Gwilhmod

Drastet e vo pa raio e gresk

"Drastet e vo pa raio e gresk ha ma verzo n'en deus mamm ebet".

Setu aze pezh en deus diskleriet divezh Elton John, ur c'haner brudet-tre diwar-benn "e vab", Zakari, bet advabet gantañ hag e bar

heñvelrevour eveltañ¹. Seurt frazenn a ziskouez ent-anat ned eo ar bugel-se nemet ur c'hoariell etre daouarn un den a anzav emañ o trastañ

¹ Diskleriet en doa kement-se e-kerzh abadenn brudet bras an "Today Show", war NBC, e-pad un dro kanadegoù edo oc'h ober er Stadoù-Unanet.

buhez ar paour-kaezh paotrig-se. Gouzout a ra Elton John pegen a-bouez eo karantez ur vamm evit ur bugel, ha ne c'hellan nemet stadañ ez eo afer lezenn Taubira un dra satanek.

Ha padal n'eo ket ar pezh a glever er meziennoù na ehanont ket da lavarout ez eo mat-tre an “*Eured evit an holl*”, zoken evit ar vugale. Pa seller a dostoc'h ouzh an enklaskoù e c'heller astenn ur steudad sifroù a sav a-du gant skiantvat an darn vras eus an dud, hag a respont d'un nebeut gevier a vez klevet :

1. “An emzivadenn n'o deus ket anavezet o mamm a vez kempouezet heñvel”. Daou skiantour amerikan, Saakvitne hag Eisold o deus studiet degouezh ur paotrig bet advabet gant daou waz heñvelrevourion. Sellout a rae ouzh matezh an ti evel e vamm. Neuze e tivizas an daou waz skarzhañ ar vaouez diouzh o zi. Da heul an dra-se, dre ma yae an traoù a-dreuz gant ar bugel, e voe kaset da welout ur bredelfennour da heuliañ un vezegadenn²... A-benn ar fin e voe kavet e klaske ar bugel dastum arc'hant betek gellout, emezañ, “*prenañ ur vamm all*” ! Un enklasker amerikan all, Mc Candish, en deus studiet degouezh koubladoù maouezed o doa implijet an emsperiadur danzeel evit “kaout” bugale. An eil maouez eus ar c'houblad, an hini ne oa ket ar vamm, a vez galvet “*Tad*” ganto, ha pa c'hoarvez ganto respont ouzh ar pellgomz e c'houlennont ouzh ar c'hendivizer klask o zad. Er studiadenne-se e lavar Candish e c'houlenn bugale pevar bloaz ar c'houbladoù lesbianed pelec'h emañ o zad, hag e c'houlennont ouzh ar wazed a anavezont “*dont da vezañ o zad*”.

2. “Ar vugale a vev e tiegezh ur c'houblad heñvelrevour n'o deus ket muioc'h a gudennoù en o buhez”. E 1993 e oa bet graet ar studiadenne gant skipailh an imbourc'her Bronstein. Ar vugale o doa kalz a gudennoù bredel : o emzalc'h er skol hag o notennoù a oa falloc'h, nebeut a stad a rejont anezho o-unan h.a. h.a. ...

Kalz a skouerioù all a c'heller kavout war ar genrouedad met ne vezont ket brudet gant ar meziennoù pa ne savont ket a-du gant ar pal a zo merket dezho gant an “*Dispac'h heñvelrevour*”, a zo e bal gwirion distrujañ ar familh henvoazel hag ar gevredigezh henvoazel hec'h-unan maz eo an Iliz an ensavadur pennañ anezhi.

Setu ar pezh a zisklerie Benead XVI a-raok dezhañ mont da Bab :

² Mezegadenn : *une thérapie*.

“Kenbod ar Vatikan Kelennadurezh ar Feiz he deus diskleriet : “*An dud heñvelrevour, evel tud, o deus an hevelep gwirioù evel ar re all, pergen ar gwir na vezo ket graet gaou ouzh o dellezegezh evel hiniennoù. Evelkent, (...) n'eo ket an tuadur revel ur perzh da geñveriañ ouzh ar ouenn, an orin kenelel, hag all hag all. Pa reer anv eus nann-gwallziforc'hañ ne c'hoarvez ket heñvel ganto rak an tuadur heñvelrevour a zo, ent-ergorel, dizurzhiat, hag a laka war wel ur gudenn zivezoniell dibarek. Bez ez eus domanioù e-lec'h derc'hel kont eus an tuadur revel ne dalvez ket drouk-disparzhegezh (pe gwallziforc'hegezh). Da skouer, pa vez fiziet pe advabet bugale, pa vez gopret skolaerion pe gourdonerion-sport hag evit tuta soudarded. N'eus “gwir d'an heñvelrevouriezh” ebet. Dre-se ne zle ket bezañ diazez arc'hadurioù war dachenn ar gwir*”.

Da lavarout eo, ne c'hell ket an heñvelrevouriezh bezañ un diazez evit arc'hañ ar gwir da zimeziñ, gant an holl wirioù a zo stag, ha pergen an advaberezh. Ha pelloc'h e lenner “*Al lezennoù a sav a-du gant koubladoù heñvelrevour a zo kontrol d'ar reizhpoell dre ma roont gwarantoù gwir d'an unaniezhioù etre daou zen heñvel o rev a c'heller hevelebiñ ouzh ensavadur ar briedelezh. En ur lakaat war an hevelep pazenn an unaniezh heñvelrevour, ar briedelezh pe an tiegezh, ez eo titek ar Stad hag ez a a-enep he deverioù dezhi-hec'h-unan. Chom hep aotren dezvad sokial ha barnerezhel an dimeziñ da stummoù-bevañ n'int ket ha na c'hellont ket bezañ priedadel ne za ket a-enep ar Yonez. Hi eo er c'hontrol, ar Yonez, a c'houlenn groñs an dra-se. Zoken dre un hevelebadur pell, ne ra ket an unaniezhioù heñvelrevour an oberoù a ro d'ar briedelezh ha d'an tiegezh un anavezadur arbennik ha doareet*”.

An advaberezh a fell d'ar gouarnamant aotren d'ar pared heñvelrevour a raio gaou bras ouzh ar vugale a vo advabet ganto dre ma vo nac'het outo kaout ur vamm pe un tad. Se am eus merket dija e niverennoù-kent *Kannadig Imbourc'h* hag a rankfe bezañ anat d'an holl paz eo skiantvat ha netra ken. Gwashoc'h 'zo avat : o vezañ ma vez lazhet bep bloaz 220.000 babig e kof o mammoù e Frañs, n'eus ket kalz a vugale da advabañ er c'hwec'hkogn : advabet e vez bugale eus ar broioù estren paour, hag ar re-se ne fiziont ket bugale d'ar broioù a aotren an advaberezh gant “priedoù” heñvelrevour. Evel-se ne vo tu ebet ken d'ar familhoù ordinal ha difrouezh da

advabañ. Ouzhpenn-se, alies-tre, e ranker gortoz hir-mat, en tu all da bemp bloaz evit advabañ e Frañs. E-keit-se ez eus chañsoù bras e vefent dispartiet, ar stadegoù diwar-benn ar pared heñvelrev en diskouez anat.

Leun a arguzennoù all, pleustrek-tre, a ra d'an nen soñjal ez eo follentez-rik reiñ dor-zigor d'ar briedelezh evit ar bared heñvelrev.

Unan anezho a zo an arguzenn armerzhel. Diouzh un tu hon eus ur Stad a zo rivinet-mik, ha diouzh un tu all e samm warni kargoù ouzhpenn diwar aotren d'ar pared heñvelrev dimeziñ en ti-kêr, daoust maz int difrouezh dre anien. Ur wech graet-se e vo ret dezhi talañ an ensperiañ kalvezadel (a viro ouzh ar vugale da anavezout gwir dad naturel bugale al lesbianed). Giz ar mammoù-dougenerezed a feurmo o c'hof a zeuio da vezañ gwelet mat gant ar re binvidik a-benn kaout bugale “gwelloc’h” eget ar re all. Dija e vezont prenet dre ar genrouedad e Bro-Indez, war lec’hiennoù-urzhiadañ a ziskouez merc’hed yaouank prest da ober bugale diouzh ar goulenn ha diouzh c’hoant an daou “Dad” :

paotr pe plac’h, daoulagad glas, ur vamm gant ur Q.I. uhel ha kement ‘zo...

Gant an dimezi digor d'ar pared heñvelrev e pellaer diouzh ar briedelezh kristen ent-anat. Rak ar briedelezh kristen n'ez a ket hep an asant da zegemer ar vugale a zeu diouzh unaniezh revel ar priedoù. Hogen bezomp onest : pell 'zo ez eo distummet a-grenn ar wir Briedelezh gant al lezennoù gall rak ne c'hell ket bezañ a wir dimeziñ pa c'heller torrdimeziñ, paz aotreer pilulennoù-hilastaliñ ha pilulennoù-diforc'hañ-bugale (nevez 'zo eo bet lakaet war wel pegen dañjerus ha doñjerus eo an div seurt pilulennoù-se eus an Ankoù !), pa aotreer an diforc'hañ bugale (adalek Sul Fask diwezhañ ez int evit netra evit ar minorezed ha roet e vezont... hep aotre ar gerent), paz aotreer ivez an Engehenterezh kalvezadel (PMA) ha zoken ar Mammoù dougenerezed (GPA) p'eo gwir ez eo bet embannet gant an Itron Taubira er JO, kazetenn gefridiel ar Stad-C'hall, e vo anavezet hiviziken ar vugale a vez lakaet da c'henel dre GPA en Indez pe e lec'h all...

T. Gwilhmod

Iliz Bro-C’hall o farlotañ ar Skriturioù

D’ar c’hentañ Sul eus ar C’horaiz e voe sachet va evezh gant ur ger dic’hortoz, bet klevet e lennadenn gentañ en oferenn, tennet eus an Adlezenn (26, 4-10). Ne oa ket e brezhoneg evel-just, e galleg e oa. Setu an arrouden 26:5 : “*Mon père était un Araméen vagabond, qui descendit en Egypte : il y vécut en immigré avec son petit clan*”. Komprenet hoc’h eus, ar ger am boa merzhed a oa “*immigré*” (enbroad), rak ur ger re arnevez eo evit bezañ en un droidigezh eus ar Bibl, hogen dreist-holl re helavar en amveziadur³ a-vremañ, ma vez deuet an enbroidi da vezañ ur gudenn er C’hwec’hkogn, hag hogos en Europa a-bezh.

Distroet d’ar gêr ez is da furchal er Bibloù a zo ganin du-mañ. E Bibl Jeruzalem (Fleurus & Cerf), ne gavis nag ar ger “*étranger*” nag ar ger “*immigré*” e-barzh ar werzad-se. E troidigezh Louis Segond (Genova) e oa heñvel, ne veze ket meneget ar gerioù-se. E Bibl Augustin Crampon, 1923, e oa ar ger “*étranger*”.

En “Oferenn ar Sul” e brezhoneg, bloavezh K, pajenn 458, e kaver ar ger “*estrañjour*”. E Bibl

an Tour-Tan, levrenn 1, en Adlezenn, n'eus na “*estrañjour*” na ger all ebet. Neuze on bet war ar genroued, da furchal gant Google evit gouzout penaos emañ kont e saozneg, en alamaneg, hag e yezhoù all, diouzh ma sav c’hoant d’an unan.

En darn vrasañ eus ar Bibloù e saozneg (un toullad ez eus) ne vez ket meneget ar ger “*estrañjour*” er werzad-se (Adl 26:5), hogen kavet em eus memestra ar ger “*foreigner*” (*estrañjour*) er Wycliffe Bible, The Voice, God’s Word translation, hag ar ger “*alien*” (ger all evit “*estrañjour*”) el Lexham english Bible hag en New revised standard version Catholic. En alamaneg ez eus “*Fremdling*” el Luther Bibel 1545 hag er Schlachter 2000. Goulennet em eus ouzh un alamanegerez perak ne oa ket “*auslander*” (*estrañjour*, diavaeziad), respontet he deus din e oa “*Fremdling*” ar ger kozh arveret dreist-holl el lennegezh. Aet on da welout er yezhoù germanek all ha kavet em eus gerioù ma oa aes a-walc’h gwelout o c’herentiez gant an alamaneg : “*fremde*” e daneg, “*fremmed*” en norvegeg, “*frömling*” e swedeg, “*vreemdelingen*” en izelvroeg. A-benn

³ Amveziadur : *contexte (circonstances)*.

an diwezh n'eus nemet e galleg, ha nevez 'zo, maz eo bet lakaet ar ger "*immigré*" (enbroad), ha c'hoazh, neket er Bibloù met el leksional da vezañ lennet e kerzh an oferennoù, hag el levrioù anvet "*Nouveau Missel des Dimanches*" evit ar feizidi, ha da heul, evel-just, e magazinoù ar wask katolik...

Ne oa ket ar wech kentañ e kejen gant ar gudenn-se. C'hoarvezet e oa ganin endeo evit ur werzad all. Ezel ez on eus ur skipailh liderezh abaoe un ugent vloaz bennak. Dalc'het em eus soñj eus ur vodadeg evit prientiñ oferenn ar Sul e ti unan ac'hanomp. An tregontvet Sul war ar bloaz e oa, hag ur wech lennet al lennadenn gentañ : Ermaeziadeg 22, 20-26, e voe breutaet war an destenn. An arroudenn 20 : "*Tu ne maltraiteras point l'immigré qui réside chez toi,*

tu ne l'opprimeras point, car vous étiez vous-mêmes des

immigrés en Egypte"

en devoa sachet

kerkent evezh an

aotrou Bodspenn, an

hini desketañ

ac'hanomp war ar

Skriturioù peogwir e

oa bet kloareg hogen

ne voe ket beleget.

Tagañ a reas diouzhtu

war gudenn an

enbroidi ma oa a-du

penn-da-benn evit o lezel da zont amañ a vil

vern, hag oc'h en em harpañ war an destenn

edomp o paouez lenn, e lavaras e oa sklaer ar

Bibl war ar gudenn-se. (testenn lennet e-barzh

"*Nouveau Missel des Dimanches*" pe e-barzh ar

magazin "*Prions en Eglise*").

Evel-just ne oan ket a-du, hag el lavar is dezhañ ;

ar maouezed ne rannent grik, hogen p'em boe

digoret va beg, unan pe ziv a savas a-du ganin.

Pezh em boa kavet iskis en destenn e oa ar ger

"*immigré*", adarre, meneget div wech en

destenn. Kavout a rae din e oa ar ger nevez-se

implijet a-ratozh en destenn evit lakaat anezhi da

genglotañ gant ar c'hemennad a vened lakaat da

dremen. Bez' e lavar is e kave din e oa a-raok ar

ger "*étranger*", pezh a voe dislavaret gant an

Aotrou Bodspenn, atav e oa bet skrivet

"*immigré*" hervezañ. Neuze e kinnigis mont da

welout er Bibl. Degas a reas hon ostizez he Bibl,

La Bible des Communautés Chrétiennes,

Editions Médiaspaul, ha skrivet e oa e-barzh

22:20 : "*Vous ne maltraiterez pas l'étranger et vous ne ne l'opprimerez pas, car vous avez été des étrangers en Egypte*". Ne oa anv ebet a "*immigré*". Ouzhpenn-se ar gerioù "*qui réside chez toi*" ne oant ket er Bibl-se. Gouzout a ran ez eus tu da zaskemmañ un tammig an destenn evit bezañ komprenet mat, hogen aze e oa gwallañ an destenn evit lakaat mennozhioù tud zo da dremen. Paouezet e voe gant an tabut evel-just : komzet he devoa ar Bibl.

Diwezhatoc'h e lennis war ar magazin "*Famille Chrétienne*", ur magazin hengounel un tamm, hogen a heuilh pizh memestra Vatikan II, lennadurioù an tregontvet Sul, ha peurgetket Ermaeziadeg 22, 20-26. A-nevez em boa kavet ar ger "*immigré*", div wech, ha "*qui réside chez toi*". Furchal a ris er Bibloù em eus meneget

uheloc'h, ne veze

meneget enno nemet

ar ger "*étranger*". Er

Bibl e brezhoneg

embannet gant an

Tour-Tan, eo bet troet

gant ar ger "*ostiziad*".

Mont a ris e

darempred gant hor

c'henvroad Lukaz

Bernicot, lenner feal

Kannadig Imbourc'h,

ha bet oc'h ober war-

dro adembannidigezh

troidigezh Gwilh ar C'hoad an Testamant

Nevez, gant ar gevredigezh Bibl en Anjev, evit

gouzout penaos e oa kont gant troidigezh Ar

Gonideg hag hini Gwilh ar C'hoad. Gant an

daou e oa bet arveret ar ger "*diavaeziad*", hag

evitañ e oa ar ger brezhonek-se an hini gwellañ

evit keyvezhañ ar ger hebreek "*gâr*". Resisaat a

reas ouzhpenn n'emañ ket ar rann-frazenn "*a zo*

o chom ganit" en destenn hebreek. Lakaet eo bet

a-wechoù e troidigezhioù zo evit resisaat

troidigezh ar ger "*gâr*".

Gouzout a ran mat-tre, ha n'on ket an hini

nemetañ, ez eo bet atav an Iliz degemerus ouzh

an dud en dienez en anv ar garitez, hogen ur

garitez dihentet eo bet a-benn ar fin, rak ober

bruderezh evit degemer enbroidi, Muslimiz evit

an darn vrasañ anezho, a oa un tammig evel

degemer bleizi en dañvadt⁴, pa ouzer tonkad

kriz ar Gristenion er broioù ma vez enno ar

muianiver gant ar Vuslimiz. Ankounac'haet eo



⁴ Dañvadt : *bergerie*.

bet gant an Iliz c’hall parabolenn ar Mesaer Mat, ha lakaat ar ger “*immigré*” e-lec’h “*étranger*” e kav din ez evode diouzh an hentenn-se, seul vui maz eus bet e-pad pell, ha ma vez c’hoazh ur wech an amzer, graet meneg, da geñver pedenn ar Bobl en oferennou a-raok an Hegaristiezh, eus an enbroidi maz eo ret ober ur plas dezho, o degemer evel breudeur, ha me oar-me... Jezuz n’eo ket ur bedelour babelian, goulennet en deus hepken e vije douget E Aviel d’an holl vroadoù, a bep gouenn, a bep yezh...

Evit skeudennaouiñ va fennad em eus lakaet un dresadenn bet tennet diouzh “*Histor an Testamant Coz hag an Testamant Nevez*”, lakaet e brezhoneg gant an Aotrou Morvan, person Pluguen, diwar “*Die kleine Bilderbibel*” (ar Bibl bihan skeudennaouet) en alamaneg, ha bet embannet e 1866, gant ar Vreudeur Benziger, moulleron e Einsiedeln, Helvetia. Diskouez a ra ar skeudenn-se Moizez hag Aaron dirak Faraon hag e c’houlennot outañ lezel pobl Israel da vont kuit diouzh Egipt, hag aze emañ marteze, zoken evit Iliz Bro-C’hall, dibenn ar breud gant ar geñveriadenn etre an Israeliz en Egipt hag an enbroidi er C’hwec’hkogn. Mar c’hoarvezfe d’an enbroidi bezañ mennet da zistreiñ holl d’o bro-orin ne vefe ket harzet outo, evel Israeliz gant Faraon. En

enep e vefent broudet gant kalz tud, daoust maz eo lavaret re vuan al lakadenn-se ganin marteze, rak ar sokialourion c’hall a c’hoarife sur-mat o Faraoned er vartezeadenn-mañ, pa ziskouez ar sontadegoù o deus 90% eus ar Vuslimiz mouezhiet evito en dilennadegoù diwezhañ.

Evit gourfennañ va fennad setu un tammig fent : emañ o paouez lenn, e-barzh “*Valeurs Actuelles*” eus ar 14 Meurzh 2013, p. 79, ur flemmskrid gant an Aotrou’n Eskob Jean-Michel di Falco, eskob Gap hag Embrun. Fustañ a ra an akademiidi emanvet a fell dezho daskemmañ ster gerioù ’zo, gant ar pal, evel-just, da zegas kemm er speredoù. Komz a ra evel-just eus an dimeziñ ha ne vefe mui hepken etre ur paotr hag ur plac’h, eus ar skolioù-mamm da zaskemmañ e skol-kentañ, eus gouel ar mammoù hag eus gouel an tadoù da zaskemmañ e gouel ar gerent, eus gouelioù an Hollsent, Nedeleg, Pask, ha n’int ket, tamm ebet, laikour ha republikan. Siwazh, ankounac’haet en deus komz eus ar ger “*estrañjour/diavaeziad*”, daskemmet e ster er Skriturioù gant Iliz Bro-C’hall, ha deuet da vezañ “*enbroad*”.

Tiernvael

Prederiadennoù diwar lenn : *Paganiezh 2/3*

4. Latin adsavet en Azginivelezh

Ar fae hollek war ved kristen ar grennamzer a c’heller rannañ e teir lodenn : a-fed adeiladouriezh hag arz, a-fed kevredigezh hag a-fed politikerezh. A-douez an teir rakvarn-se, an hini gentañ nemetken a zo bet aet da get : ankounac’het eo bet an dismegañs diharz stag ouzh ar sevel-ilizoù anvet *gotek*, hag ijiner-tiezh a-vicher ebet ne lavarfe en amzer-vremañ eo grobis ha goullou ar pennilizoù gotek a-fed arz.

A-fed yezh ivez ez eus ur rakvarn anat c’hoazh hiziv : al latin pagan a reer anezhañ klasel, peurvat, latin kaer, hag al latin kristen n’eus anezhañ nemet un trefodaj izel-latin. Lenn a ranker evit krediñ, lod geriadurioù bet savet gant kloer eus mare an Azginivelezh, a zispleg dic’hoarzh traoù evel-mañ : evit treiñ “*pec’her*” e kinniger *Noxae reus* (*peccator latinum non est, nec invenitur nisi apud auctores ecclesiasticos*). Kemend-all a reont evit holl c’heriaoueg an Iliz ; gant troidigezhioù re hir e vezent lakaet diaes a-wechoù : *transubstantatio* n’eo ket latin eo, trefodaj ijinet gant kristenion null ne lavaront ket, neuze e ranker lavarout *Unius substantiae in alteram transmutatio*. *Pantalonum* n’eo ket latin eo, neuze e ranker lavarout *Vestis inferior ustrictior, ab cervice ad imos usque pedes continenti textu pertinens, apteque exprimens artus*. Ankounac’haet eo bet al “latin adsavet”-se en Iliz

hiziv, ha den ebet ne glemmo en abeg da se ! E galleg avat ez eus gerioù-adsavet iskis e-leizh, evel *décimètre*, ur meskaj etre ur wrizienn c’hresian hag unan latin (ur fazi na vije bet graet morse gant ar Romaned pa amprestent gerioù digant ar gresianeg), hag ouzhpenn-se eo kontrol e ster d’ar pezh a vefe gortozet : talvezout a ra kement hag “un dekved metrad” e-lec’h “dek metrad”. Addispleg an Ao. Gaume war seurt geriaoueg : “*seurt kaotaj n’eo na latin na gresianeg, met liv pagan a zo warnañ, hag an dra-se eo a gont moarvat*”. Fentus eo neuze gwelout ebestel deol ar yezh ez eus bet adsavet ar muiañ he geriaoueg, evel Françoise Morvan da skouer, feuket gant ar yezhkarouriezh vrezhon!

E bed an Azginivelezh ma ranked adsevel koustet a gousto ur bed aet da get ur pemzek bennak a gantvedoù a-raok, eo reizh e vefe kresket fonnus skiant ar c’heñveriañ testennoù kozh hag an dezvarn istorel. En Azginivelezh eo e weler evit ar wech kentañ skrivagnerion evel Bayle o tispenn a-vil-vern labourioù istorourion all hep krediñ morse skrivañ ul levr istor eñ e-unan. Olavo de Carvalho a verk er *Jardim das Aflições* :

“*Un darvoud divoutin-tre eo. Ma lakaer a-gostez Sina hengounel, ur vro renet gant burevourion lennek a c’helle bezañ kendaonet d’ar marv evit ur fazi reizhskrivadur, n’eus sevenadur ebet a vefe bet*

biskoazh gwall zedennet gant an deiziadañ-parchoù hag ar c'hask-war-lerc'h-gwir-anv-oberer-ur-skrid. Er grennamzer e veze kemmesket dichal penn-da-benn skridoù un diskibl bev gant re ur mestr aet d'an anaon, kantvedoù war-lerc'h marv hemañ (...)” (notenn p.167 embannadur 2004).

A-raok *Sola Scriptura* ar Brotestanted e oa dija *Sola Scriptura* latinegourion an Azginivelezh. Hag evel e degouezh ar brotestantiezh, an unvaniezh n'oa ket perzh kreñvañ ar ouiziegiñ-se: Erasmus a gave abeg e latin Kikero, Skaliger a zispenn mennozhioù Erasmus, oc'h ober anezhañ *mendax, vino sopitum, parricida*. Skaliger e-unan a veze kavet miliadoù a faziou-latin en e skridoù gant Skioppius. Lambekius a ziskare labour Skioppius, oc'h ober anezhañ *canis grammaticus*. Valla en em ginnige evel adsaver-meur latin ar c'hantved aour, hag en doa embannet ur pezh levr in-quarto er par-se. Pogge a embannas ul levr ken tev all evit prouïñ ne ouie ket Valla sevel frazennoù latin, ha klozañ a rae e levr o kas Valla da sutal, ur gurunenn graet diwar teil war e benn, war gein un azen. Valla a respontas gant 200 pajennad prouennoù-diazezet-war-parchoù-kozh hag anvioù flour roet da b-Pogge, en o zouez *furcifer, delirus senex ...* Hag all, hag all, e-pad ouzhpenn 200 vloaz ; dre ziouer a gadourion e echuas ar brezel. Hag anavezet gwelloc'h eo bet al latin pagan evit keloù-se, diwar ur sellboent yezhoniel strizh ? N'eo ket bet, hervez an Ao. Gaume.

Bro-C'hall, a-bell, zo unan eus broioù Europa kontammetañ gant spered an Azginivelezh, a zo ivez unan eus ar broioù ma ouzer an nebeutañ al latin enni. Gaume a veneg testeni Merser e 1782 :“ *E Pariz hiziv ez eus dek skolaj a soub ar skolidi el latin e-pad seizh pe eizh vloaz, ha 99% anezho a guita ar skolaj hep gouzout ar yezh*” ha restadennoù all damheñvel : “*Pediñ a ran Doue ne zeuio biken ur arvester saoz pe alaman d'hon arnodennoù latin dre-gomz evit bezañ resevet er skol-veur, pe d'an nebeutañ ne vin ket en e gichen, kuit din da vezañ marv gant ar vezh ...*”. Moarvat emañ ar gwir gant an Ao. Gaume pa lavar “*Ar re a glask deskiñ latin pe gresianeg pagan oc'h ober fae war al latin pe ar gresianeg kristen ne ouezint nag an eil nag egile en diwezh.*”

5. Paganerezh sevenadurel

O lenn an daolenn eus an diduamantoù kristen kent an Azginivelezh savet gant an abad e oa deuet soñj din eus pardonioù Breizh. “Ret eo dudiañ an dud gant aked hag en un doare klok kuit dezho da vont da glask dudi pelloc'h” : sed aze unan eus ar reolennoù pennañ a voe heuliet gant an Iliz evit krouiñ he diduamantoù piaouel. An diduamantoù kristen a vez graet e-pad an deiz, dalc'hmat hollforan hag a-wel d'an holl, hag “*aner eo klemm ne dae ket an dud d'ar skol er marevezh-hont ; n'oa netra poblekoc'h eget ar gelennadurezh kristen*”, eme an Ao. Gaume. E kreiz dodennoù ar misterioù c'hoariet kristen e kaver

ar gelennadurezh relijiel, kinklet gant kement a livioù broadel pe rannvroel-strizh ma karer.

Kontrol-mik eo an diduamantoù pagan bet enporzhiet eus Italia an Azginivelezh gant broadoù all Europa. Ar c'hoariva pagan, ganet diwar kentelioù lennegezh ar skolajoù, a dremenas dre an ostalerioù prevez ha lezioù an noblañsoù, ha ne droas da “c'hoariva foran” nemet diwezhatoc'h. Da noz e veze c'hoariet peurliesañ, e saloù enk ha damsklerijennet, mat da vroudañ ar c'hadaliezh ha bondougoù all. Ha danvez ar c'hoariva-se, gresian-roman c'hoazh ha c'hoazh, a zo estren penn-da-benn ouzh holl sevenadur europat kristen an ampoent, an danvez-se ne c'hall bezañ komprenet neuze nemet gant un nebeudig a dud desket : n'int mui diduamantoù evit an holl. Ar bobl avat en em lak da jestraouiñ an holl c'hizioù nevez-se gant an aon rak bezañ warlerc'hiet. An diforc'h a yezh a voe digarez d'an noblañsoù da seveniñ e latin pe gresianeg traoù n'o dije morse kredet ober en o yezh-vamm-pemdeziek, tebet kristenion ma oant : war hent ar “garantez dieub”, ar “frankiz-soñjal” edont, evel ma lavarfed hiziv. An holl frankiz nevez-se a lakae reuz un tammig war he hent : e metoù an noblañsoù paganekaet-se e yeas war-gresk trumm niver ar muntrou a avoultriezh, ken e voe ret sevel ul lez-varn a-ratozh evito dindan ren Loeiz XIV, *Kambr ar C'hontammoù* mil vrudet.

An abad Gaume a zegas soñj deomp penaos diwar ur sellboent kristen - ar c'horf a-bezh koulz lavaret n'eo nemet kig er ster dismegañsus roet d'ar ger-se en Aviel, n'eus nemet an daoulagad ha neuz an dremm a c'hallfe ezteurel speredelezh. Setu perak en arz koulz hag er gizioù gwiskamantel kristen e vez lakaet war-wel an daoulagad hag an dremm hag e kuzher ar peurrest peurliesañ (n'eo ket ken disheñvel neuze ar sellboent kristen diouzh an hini muslimat er par-se). “*Kent an Azginivelezh an dilhad a vez implijet da guzhat, war-lerc'h an Azginivelezh e vezont implijet da reiñ da welout,*” a ziverr an ao. Gaume, ha prouïñ a ra ar pezh a lavar gant renabloù-gizioù-gwiskamantel evel re Onésime Le Roi da skouer. Ur wech ouzhpenn, ret eo lenn evit krediñ un ordonañs gant Fulub Kaer a Vro-C'hall : “*(...) Ne aotree d'ar c'honted ha duded nemet pevar gwiskamant ar bloaz, kement-all evit o gwraez, daou evit ar varc'hegerion, unan nemetken evit ar baotred hag ar merc'hed n'int ket aotrounez (...)*”

An delwenoù hag al liverezh ne voent ket paganekaet nebeutoc'h eget an dud : kleñved an noazhegezh en em ledas e pep lec'h. Delwenoù ha tudennoù an Azginivelezh a ziskouez korfoù kigenet-kaer dindan dremmoù plaen hag amlavar, evel kelanoù a glaskfed dasorc'hiñ anezho dre c'hwezhañ aer e-barzh. Kentelius eo ivez degouezh an aeled. Liverion ha kizellerion an Azginivelezh, n'o doa a-hervez tamm meizad ebet eus petra eo un ael kristen, ne c'hallent skeudennañ aeled nemet diwar skwer ar boudoù heñvelañ er gwengLOURIEZH

gresian-roman, Kupidon pe arc'houereed neuze. Hag e reer e-giz-se babigoù noazh maget-mat, tev o zivjod, eus an aeled ... pa'z int kannaded kantmoedel er bed kristen. War veur a siell e tiskouezer ivez aeled evel lakizion d'un noblañs bennak, pa ne servijont nemet Doue.

Evel-se “*eo aet an ilizoù da vut, ken e c'hellont bezañ implijet hep re a ziaezamant evel c'hoariva, labouradeg pe moskeenn.*” Ur c'haotaj spontus er gwellañ eus an degouezhioù, hag er gwashañ degouezh, ur sakrilaj. Erasmus e-unan a glemme e sigur ar meskajoù-se.

6. Paganerezh politikel

Eus ar sevenadur d'ar bolitikerezh, e vez diskouezet sklaer a-walc'h deomp gant an Aotrou Gaume an hent heuliet gant ar baganiezh. An emlzh a veze meizet er grennamzer evel ur pec'hed euzhus, ha dibaot-dibaot e oa en abeg da se end-eeun. Hiziv eo boutin ha ne vez mui feuket den ebet gant ar mennad emlzhañ, meulet e vez zoken a-wechoù. Hag er skridoù kentañ a zegasas en-dro giz an emlzh en Europa e vez meneget skwerioù pagan, na petra, Kleopatra da skouer. Heñvel dra gant ar rouelazh : damheñvel e oa ar boureviadurioù evit an disivoued hag al lazherion-roueed er grennamzer, gant an Azginivelezh avat e voe hollvrudet skwerioù pagan evel hini Brutus (diniver ar skrivagnerion bolitikel eus an dispac'h gall pe norzhamerikan a zo Brutus o anv-pluenn, diniver ivez ar pezhioù-c'hoari a zo stag da v-Brutus o zanvez). Mall war al lennerion pe arvesterion-c'hoariva treiñ ar gentel da ober, hag enebañ, mallozhiñ ha lazhañ en diwezh ar roue, an dug pe ar c'hont tostañ outo. N'eo ket souezh neuze e vefe Europa o “*c'hoari polotez gant pennoù ar roueed*” abaoe, evel ma lavar an aotrou 'n abad.

Ar gristeniezh, oc'h addegas buhez da restachoù damvarv an impalaeriezh roman, a zesavas yezhoù, broioù, rannvroioù, hengounioù e-leizh. A-fed gwir, e-kichen an haol roman a-gent miret er skridoù met arveret nebeut hag ankounac'haet pe dost, e oa ar gwir kanonek hag ar gwirioù broel pe rannvroel diniver. Er barnvodoù kristen e veze barnet ur Galian gant Galianed, ur Frank gant Franked, ha dalc'hmat e klasked barnerion er renkadoù kevredigezhel tostañ ouzh hini an damallidi. Prosezioù dibrokulor, dialvokad, diskrid, war a vez testeniet gant ar c'hanseller de l'Hospital ha re all ; bozamantoù ar c'horn-bro anavezet dre an eñvor gant an holl a oa a-walc'h.

Ar reizhiad-se a voe paganekaet tamm ha tamm, abalamour da c'hoant-emuhelaat ar renerion bolitikel peurliesañ, ha dirak enebiezh reizh an Iliz (kv. da skouer builhenn *Dolentes* ar Pab Inosant IV). Ar parlamantoù a oa da gentañ strolladoùigoù berrbad beajourion karget da reiñ ar justis en anv ar roue ; ar parlamant difiñv kentañ a voe krouet e Pariz e 1300 (parlamant Breizh a voe krouet e Gwened gant un ordonañs a Frañsez II d'ar 22 a viz Gwengolo 1485,

ha digoret e veze adalek ar 15 a viz Gouhere betek ar 15 a viz Gwengolo bep bloaz). Un aotre arbennik a ranked goulenn digant ar roue evit degas ur prokulour d'ur prosez ; Frañsez Iañ a Vro-C'hall a grouo aotreoù-peurbadel e 1528. E pep lec'h ma voe addegaset an haol roman dre intrudu ur rener politikel bennak, e voe ezhom eus alvokaded evit kompren ha displeg an haol-se, da vezañ desket gant studioù hir ; setu krouet neuze renkad an alvokaded ker da baeañ, gwelloc'h ganto ar prosezioù hir gant klianted pinvidik, alvokaded digas ouzh hengounioù ar vro ... Hag evit ar c'haezh Yann Gouer, lezennoù digomprenadus, barnerezh faltazius... Hervez Jarcke ez eo an haol roman penn-kaoz d'ar brezelioù-kouerion gwadek en Alamagn e grez Luther. Setu ivez perak e voe berzet an haol roman e feur-emglev Tübingen e 1514.

Digarez e oa an haol roman evel-just d'ar roueed da vont da Gaezared. Ren Loeiz XIV a verzer mat ennañ an unanded etre ar paganerezh sevenadurel (c'hoariva pagan, arz pagan e Versailles) hag ar paganerezh politikel (kevredadurioù gwech gant muslimiz pe brotestanted, gwanaat an noblañs dre lezennoù pe dre zibochañ anezhi, rediañ kelenn an haol roman). “*Ur fazi e vefe enebañ an Dispac'h ouzh an “Ancien Régime”, ne oa netra “ancien” e obererezh roueed ar marevezh-se (...) Reizh e oa enebañ ouzh paganerezh ar roueed, met e-lec'h ur respont kristen e voe respont ken pagan all ar skolajidi lennek.*” Gwir, Makiavelli a zo tad speredel d'an daou du war un dro en afer-se : d'ar roueed koulz ha d'an dispac'herion. En arnodskrid deuet er-maez nevez 'zo gant Olavo de Carvalho, *O Enigma Maquiavel* (an amrin Makiavelli) (É Realizações, 2008), e kinniger kompren e oberenn evel *satanouriezh*. Ha kalz restadennoù digant Makiavelli a glot gant seurt mennozh pe feiz : “*Morse ne skrivan ar pezh a soñjan, ha morse ne gredan er pezh a skrivan.*”, “*Pa c'hoarvez ganin distagañ ur wirionezenn bennak, e hastan buan kuzhañ anezhi dindan yoc'hadoù gevier.*” An holl gempredidi koulz lavaret a voe heuet gant oberenn Makiavelli, ha betek Frederig a Brusia diwezhatoc'h a skrivas ul levr a-enep dezhañ. N'oa ket diabeteg an euzh-se : ar *c'helenner-meur a efedusted politikel n'oa e vuhez a-bezh nemet un heuliad c'hwitadennoù politikel*, evel ma ra Olavo de Carvalho anezhañ, a awenas diskibled muioc'h-mui e pep lec'h. Digarezioù diniver a voe kavet hag a vez klasket c'hoazh da v-Makiavelli : un “arzer”, un “arvester skiantel-neptu”, un “diouganour”, “unan oc'h ober goap eus politikerezh e varevezh” ... Pa lavare Winston Churchill, “*Un dra re sirius eo ar wirionez e politikerezh evit bezañ lezet e diraez n'eus forzh piv. Kalz gwelloc'h eo goudoriñ anezhi gant mogerioù didreuzadus a c'hevier*”, e oa ur makiavelour-rik anezhañ, evel kement a bolitikerion all hiziv.

Ewan Delanoy

An Amzer a zo un talant fiziet ennomp

E parabolenn an talantoù (Mzh 25,14-30, Lk 19,12-27) e tizolomp un Doue hag a fiz e zonezonoù, e roadoù, e binvidigezhioù en e grouadurion evit o lakaat da dalvezout.

Pep unan a resev disheñvel an eil diouzh egile. Bez' ez eus avat ur c'hevala, un danvez fiziet en holl hag a zo an **amzer**. "*Amzer a zo evit pep tra...*" eme Furnez Sirac'h. Ya, an Aotrou Doue en deus roet dimp an amzer, dimp-ni da vezañ mestr warni. Ur prof eo a-berzh an Doue Mat. Ur binvidigezh n'eus nemeti ha n'eo ket ingalet pe lodennet heñvel da bep den.

Rak nikun ne oar pegement a amzer a c'hello aber e vad ganti. Marteze kalz. Marteze nebeut-tre. Den ne c'hell gouzout. Ne ra forzh e gwirionez ! Ar pezh a gont nemetken ez eo an implij mat anezhi. Ar pezh a zo fraezh eo ne zistro ket an amzer en-dro. Bez' ez eo evel ar bara fresk a-vremañ, ret eo hen debriñ diouzhtu, ne c'heller ket mirout anezhañ.

Sklaer eo eta ez eo kudenn an amzer ur gudenn abouez. Rak boudoù bresk omp-ni. Hor buhez-ni a zo berrbad, tremeniat, istribilhet ouzh un neudenn. Ne ouzomp ket hag-eñv e vo ur "warc'hoazh" evidomp. Hervez ar salmoù, ez eo buhez an hinienn war dec'h, bevennet, krennet, dister. Pa soñjer, nebeut-tre a amzer hon eus da vevañ war an douar. Ha koulskoude, daoust maz omp tudennoù dibad, ez omp tudennoù peurbad. Tonket eo dimp, azavet⁵ eo dimp ur vuhez dibenn ebet dezhi.

Setu perak hor Salver hor ped da vezañ mat da lakaat an talant-amzer da dalvezout. Evitañ, n'eo ket an amzer ur sac'h goull da leuniañ, met ur mareig n'eus nemetañ ma ra Doue sin dimp. O leñvañ war Jeruzalem, e lavare Jezuz : "*Jeruzalem, te n'ac'h eus ket anavezet an amzer maz out-te bet gweladennet*". Koulskoude en deus Doue lezet tost da zaou ugent vloaz d'ar Yuzevion evit morc'hediñ da vezañ lakaat E vab Jezuz d'ar marv. Hogen n'o deus ket keuziet, n'o deus ket goulennet pardon, n'o deus ket kantroet, neuze ez eo kouezhet tan dial Doue war Jeruzalem er bloaz 70. Distrujet penn-da-benn eo bet ar gêr santel gant he zempl, ha lazhet he holl annezidi, gant legionoù roman Titus, brec'h dialour Doue. N'eo ket chomet maen war vaen eus ar gêr, evel ma oa bet diouganet gant Jezuz (lenn "*Brezel ar Yuzevion*" gant Flavius Jozef).

An amzer... setu ur chañs, ur feuz⁶, ur c'hras, ur pred a c'hellomp aozañ, kempenn, diouzh hor c'hoant. Met n'eo ket ne vern penaos. Ne c'heller ket douarañ an talant. Rak talant ar C'hrouer eo. "*Lakait an amzer da frouezhiñ...*" a skriv Sant Paol d'an Efezidi.

Diwallomp ! Ar "Bed" a ginnig dimp a bep seurt

trevelloù evit tremen an amzer. Da skouer, an eurioù kollet stok ouzh ar skramm skinwel. War an hevelep tro avat, ar "Bed"-se en deus spont bras ouzh an amzer o vont hebiou. Peogwir ne gred ket er beurbadelezh, e soñj dezhañ e c'hellfe mirout ouzh an amzer-se da nijal kuit. Aon en deus ouzh an amzer o tec'hout d'an daoulamm.

Ur c'hevala prizius eo an amzer bet fiziet ennomp gant Mestr Meur an amzer evit ma vo lakaet da zougenn frouezh. Arabat eta lazhañ, koll, foranañ, drouziviañ, tremen hebiou, lakaat da dremen, leuniañ evit leuniañ. Daou vevel ar barabolenn o dije gallet, gant ar peadra a oa en o daouarn, pakañ un tamm plijadur hir. Pa ne ouzer ket pedavare e tistroio an Ozhac'h-Meur e ranker bezañ war-c'hed, eleze chom oberiant.

E pep stumm, evit pep unan ez eus mall, rak berr eo ar bloavezhioù. Gwashañ tra eo en em lezel da vevañ ! Met mar lakaomp urzh en hon amzer, e eostomp kalz a levenez. Hag ur C'hristen a renk, a gempenn e amzer hervez e vuhez er C'hrist. Ober a ra gant e amzer evit mad an Aotrou Krist. En em c'houlennomp eta ha bez' ez eomp d'e heul, e gwirionez. Neuze e vo amzer evitañ. E tle hon holl amzer mont gantañ.

"An amzer a-vremañ" (Ef. 5) eo an amzer evit bezañ aloubet gant hor Muiañ-Karet. An amzer eo evit anavezout, karout, servijiñ an Hini a zo kaset dimp gant an Tad. Mar bez graet ganti evit traoù all, e vez foeltret, mazaouet⁷ ar road-se, an talant-se. An holl amzer eta a zle bezañ implijet evit anavezout, karout. servijiñ an Drielezh Wenvidik.

Evel-just, kement-se ne c'hell ket bezañ, mar n'eo ket hon amzer un amzer evit ar re all. Amzer evit ur servij. Evit ur gejadenn. Amzer evit selaou, kenerzhiañ, displegañ, frealziñ. Amzer evit gouzout muioc'h ha gwelloc'h. Evit labourat evit netra. Evit bezañ breur d'ar re all. Amzer evit kas an hini all gant hor c'harr. Evit danevelliañ kontadennoù d'ur c'hrouadur. Evit aozañ un tamm boued. Evit rannañ mousc'hoarzhioù... An amzer n'eo ket emouestlet da garout a zo amzer gollet. An amzer evit karout a zo enskrivet war dremm eurier an Neñvoù hag a zo peurbadel.

Da boent hor marv, na keuz hor bezo da vezañ bet chomet hep en em vataat eus an amzer ! Met, dimp da c'houzout, n'eo morse re ziwezhat da stagañ ganti. Arabat eta kas da warc'hoazh ar pezh a c'hell bezañ sevenet bremañ-souden. Diwallomp n'hor befe ket amzer da ganttreiñ⁸. Gwallziouganou a vegozh ar bed a-bezh. Renet eo kalz broioù gant tud difeiz a ra

⁵ Azavet : *prometet*.

⁶ Feuz : *chance*.

⁷ Mazaouiñ : *gâter* ; arabat meskañ gant "mazaviñ" = *pardonner*.

⁸ Kanttreiñ : *se convertir*.

lezennoù fall a-enep lezenn Doue. “*Truezus ha trugarezus eo an Aotrou, gorrek da gounnariñ ha bras en madelezh*” a lavar deomp ar Salm 145:8. Ya, met pa sav kounnar ennañ, e kounnar, soñjit e Jeruzalem er bloaz 70 pe e Sodom ha Gomorrha. Hor Breizh n’eo ket mui Breizh Santel a wechall. Mard e vo gwarezet hor Bro dre un deved arbennik a-berzh Doue da zeiz E gounnar (diouganet gant Mari-Julia Jahenny e Blaen, hag e Kerizinen ivez), ne vo ket a-drugarez d’ar remziad breizhat a-vremañ, a zo ken

renaviat hag ar re all (en abeg d’ar vedelidigezh ha d’ar yoc’hstlenn), hogen a-drugarez d’hon Tadoù kozh a zo bet tud a feiz, hag o deus savet miliadoù a chapelioù, a galvarioù, a groazioù, evit E enoriñ, enoriñ E mamm, hag hor patronez Santez Anna.

Amzer ‘zo c’hoazh da zistreiñ da zispenn roudoù hon Tadoù Kozh, re vuiañ-karet Doue, hogen arabat daleañ re, tudoù !

Youenn Troal


Notennoù diwar an darvoudoù gant Yann Maneguen

E Minihi Levenez Nn 133b e lenner prezegenn Job an Irien d’ar 27 here 2012 "Daoust hag e vo en amzer da zont brezhonegerien (g)kristen ? Brezhonegerien a vezo , anat eo, (...)Niver ar (...) re yaouank gouest da gomz ha da soñjal e brezhoneg a ya war gresk. Marteze n’eo ket ar brezhoneg a anavezomp-**ni**, ar re goshañ ... met o brezhoneg dezho eo. Ur brezhoneg modern eo, gant kalz gerioù nevez ha ne gomprenomp ket atav, rak ni n’hon eus ket bet a skol vrezhonek [notenn ganeomp : *Ober, SADED, lennegezh Gwalarn, Al Liamm, Diwan h.a.*]. Un troc’h a chomo atav etre o brezhoneg dezho hag **hon hini**. Met ne ra forzh a-benn ar fin : int-i a glask lavarout o idantelezh dre o brezhoneg, ha ni hon hini." Talvezout a ra ar boan lenn ar pennad a-bezh, koulz hag ar pennad a-raok e galleg gant Yves de Boisanger war roudoù ar feiz a gaver er yezh hec’h-unan (lenn ivez Imbourc’h niv. 310 Troioù-lavar kristen e brezhoneg).

E-barzh niv. 122 an “Dictionnaire de Biographie Française” ez eus ur pennad resis a-zivout an Tad **Mikael an Nobletz**, bet skrivet gant Fañch Morvannou. Emañ o paouez embann ivez eil levrenn e oberenn diwar-benn an Tad Maner.

Gant Jean Raspail (skrivagner “Le Camps des Saints”) hag Alain Sanders a skriv er pemdezieg “Présent”, eo bet skrivet ul levr, “*Armand de la Rouerie, l’autre héros des deux Nations*”. Gant Reynald Secher (istorour brudet, sellout izeloc’h) eo skrivet ar c’hentskrud. Piv e oa ar “C’horonal Armand” ? El levr-mañ ez eo danevellet e vuhez gant skrivagnerion c’hall a zistaol an Dispac’h Gall hag a verk mat e teue an den diouzh luskad touellus ar “Sklerijennoù”. Dre-se, rediet a-hent-all da guitaat Frañs da heul ur muntr, e voe unan eus an ofiserion c’hall a reas d’an Amerikaned gounid “Brezel an

Dizalc’hiezh”. Lesanvet eo “ar c’horonal Armand” gant an Amerikaned dre ma oa aet d’a gemer perzh e brezel-dieubiñ ar Stadoù-Unanet tri miz a-raok Lafayette, e penn ur bagad soudarded paeet gantañ e-unan. Diwezhatoc’h e voe heuet gant doareoù an Dispac’h Gall a-enep frankizioù Breizh hag ar relijion hag e prietas emsavadeg ar Chouanted o sevel un arme kuzh da adc’hounit he frankizioù da Vreizh. (“Armand de la Rouerie” - 23 euro franko, Atelier Fol’fer BP 20047 28260 Anet).



Reynald Secher, en deus skrivet meur a levr diwar-benn brezelioù ar Vendée (an hini diwezhañ “Du génocide au mémoricide”), ha kollet gantañ abalamour da se e blas a gelenner skol-veur, en doa kendalc’het da stourm evit ar wirionez en ur sevel ivez BT-où war istor Breizh, a grog bremañ da sevel filmoù war ar memes danvezioù gant ... Amerikaned. Tro en deus bet ivez da vurutellañ rolloù-keleñn nevez an Istor er skolajoù-liseoù : “*Evit abegoù kealiadurezhel ez eur mennet da ziskar keleñnerezh an Istor o lakaat rediek an “hentenn hollek” (méthode globale), pezh a dalvez da bouezañ war demoù ‘zo*

kentoc’h eget war ar gronologiezh ha war an dud. (...) Gant ar programmoù nevez (met se a bad abaoe 30 vloaz) ez eo bet lakaet a gostez an holl dud a ya da frammañ an istorouriezh e Frañs : Klodwig, Karlez-Veur, Hugues Capet, sant Loeiz, Loeiz XIV, Napoleon...”

Gant studiadennoù **Marion Sigaut** ez eo deuet er-maez ul levr all, “*Mourir à l’ombre des Lumières, l’énigme Damiens*” a zo kentelius-tre evit kompren penaos ez eo deuet an Dispac’h Gall da heul ar Sklerijennoù. War lec’hienn “*Egalité et Réconciliation*” Alain Soral ez eus prezegennoù e lec’h ma kinnig an aozourez he imbours’hioù a ro da

gompren al liamm a oa etre Ar Sklerijennoù, ar Jansenisted, ar Brotestanted, ar Varnerion hag a wanaas kement galloud ar roue betek degas reuzioù an Dispac'h. Notiñ a c'heller da skouer eo emzalc'h prokolor Parlamant Reizh hag ezel oberiant eus ar Sklerijennoù, Loeiz Ar Chalotez, a gendaolas da brientiñ an Dispac'h, en ur zifenn gwirioù Breizh, da welout evel-se d'ar c'hentañ sell, hogen dreist-holl o stourm taer a-enep an Iliz (evit un darn e voe kiriek da zivodadur urzh ar Jezusted) hag ouzh ar roue. E warlerc'hier a voe kaer dezhañ klemm dre lizher ouzh an Dispac'herion : deuet e oa a-benn diskibion ar Sklerijennoù da ziskar ensavadurioù diwezhañ ar Stad Vrezhon.

Non habemus Karta Europa ar yezhoù rannvro : Ar c'hannad frankvason Urvoas, paotr ar brezhoneg er PSF, goude bezañ bet servijet da rastellat mouezhioù an emsav evit envel Hollande da brezidant ar Republik, en em gav nec'het, sañset⁹, dirak ar Vrezhoneg bet lorbet ur wech ouzhpenn gant promesaoù ar bolitikerion gwerzhed e gwirionez da c'halloud Pariz. Evel da vare an Dispac'h Gall e seblant ar paour kaezh emsav bezañ margodennet gant ur gealiadurezh (n'eo ket mui ar Sklerijennoù met ar Vedelouriezh a zo a-zindan renerion Vrussel) da wanaat ar Riezstadoù. A-du omp gant gwanaat ar Stad C'hall da reiñ frankiz d'ar broioù (Skos ha Katalonia a seblant dont a-benn) hogen rankout a reer stadañ ez a evit poent ar galloud a Bariz da Vrussel, ha n'eo ket a Bariz da Vreizh... hag o Unvaniezh Europat a zo suj d'an Arc'hant Bras a zegas er vro enkadennoù spontus (dilabour, feurgenel o koazhañ, divroerezh...).

Kristengaserezh en Naoned : E miz meurzh e oa bet treset ur groaz satanek melen ouzh dor an iliz-veur. E-diabarzh iliz sant Klemenz an Naoned e oa bet skrivet "SS" war ar c'holonnennoù e miz C'hwevrer. E iliz Itron-Varia ar Porzh-mat ivez. Bloaz a-araok e oa bet torret delwennoù e Sant-Klemenz hag Sant Donasian, d'an hevelep deiz, e oa bet disakret an iliz ivez. Ur wech all, e Sant Klemenz e oa bet devet ar gador kofes. E Sant Similian Naoned e-pad an noz d'ar Gwener 22 a viz Meurzh ez eus bet unan o staotat er pinsin dour benniget, o vutuniñ en iliz hag o laerez bank an ograou hag ur banniel kozh gant erminigoù. Enskrivadurioù en deus graet war an ograou. Ivez, 45 bez a oa bet disakret e bered Penc'herieg (Piriac/mer) e pennkentañ miz Meurzh.

Penn-iliz Itron Varia Geloù Mat Roazhon, e-kichenik liorz an Tabor a zo bet aloubet gant estrenion dibaper da c'houlenn ouzh an Iliz sikour dezho da gavout lojeiz, ha da gaout da c'hortoz un iliz dizimplij e Kêryann Roazhon. A-benn ar fin, pa soñjer, ez anzavont eta ez eo troet mat ar Gristenion

⁹ E penn bodad al lezennoù en Assemblée Nationale emañ padal. Evit Lezenn Taubira en deus labouret eus ar c'hentañ e keit-se !

ouzh ar beorion, met, betek vremañ ez eo d'ar Stad ober war-dro seurt traoù, hag un iliz n'eo ket graet evit bevañ e-barzh (n'eus na dour na privezioù !). Ul lec'h sakr a rank bezañ doujet outañ ez eo. E Brest en doa goulennet an eskob nevez 'zo ma vefe skarzhet an estrenion dibaber diouzh ti parrez Kizag evit abegoù a surentez.

Sex toys da Zevezh ar Maouezed e Roazhon : Da geñver Devezh etrevroadel ar Maouezed (8 a viz Meurzh) e oa bet gwelet skritelloù-bruderezh gant ur sex toy da bediñ ar merc'hed "da dridal" en abadenn Velldroad e Stad Hent an Oriant. Muioc'h-mui e vez aloubet ar gevredigezh gant seurt traoù vil. An deiz all e oa anv eus se war France 3, e abadenn geleier da goan, d'un eur ma vez bugale o sellout, eveljust.

Helazherezh : en Izelvroioù e c'houlenn bremañ ur maodiern e vefe helazhet ar folled.

Eskob kozh Frejus-Toulon, Jozef Madeg a zo aet da Anaon d'ar 5 a viz C'hwevrer 2013. Brezhoneger mat e Pleñver e-kichen An Alre. Beleget e 1947 goude e studioù e kloerdi sant Loeiz Roma (aotreeg war ar feizoniezh hag ar skiantoù war ar Bibl) e voe rener kloerdi Gwened e 1965.

Anvet Vikel-vras e 1975 e Gwened e voe eskobet e 1983 evit sez Frejus-Toulon. Gant koazhadur niver ar veleion ha kudenn ar pezh a veze kelennet er c'hloerdioù e Frañs da heul falsspered "Vatikan II" e tigoras ur c'hloerdi bras dezhañ e-unan e Toulon, a reas berzh mat abaoe, hag e roas degemer d'ar c'humuniezhioù nevez a oa gwelet fall e Frañs en o zouez kumuniezh Sant-Marzhin, kumuniezh an Emmanouel, kumuniezh ar Verb a vuhez.

Eirin go Bràch ! Iwerzhon da viken ! En Iwerzhon ez eur deuet a-benn gwelloc'h eget e lec'h all eus an enkadenn gellidel : kresk ar binvidigezh er vro a zo savet e 2011 da 1,4 %, hag e 2012 nebeutoc'h eget 1% (0 % e Frañs). A-benn 2015 e rakwelet en em gavo divigad kellidoù ar Stad dindan 3 %. An ezporzhiadurioù a ya war greskiñ endro hag e 2011 ez eus bet 150 embregerezh estren o deus krouet 1300 post labour er vro. Ur youl kreñv-tre a-berzh a bobl a-bezh a zo penn-kaoz d'an disoc'hioù mat-mañ : digresket eo bet dispignoù ar stad ha kresket an tailhoù (da skouer eo bet kresket an TVA a zaou dre gant ha digresket goprou an dud dindan ar stad a zek dre gant, pezh a vefe dibosubl e Frañs). Ha n'eus bet manifestadeg ebet a-enep d'an holl disentezioù-se.

Gounezet en deus ar c'hazetenner **Serge Le Luyer** (*Ouest France, Le Monde*) en eil priz evel "Kazetenner Gaouiad" ar bloaz 2012 peogwir en doa kemmet anv-bihan muntret ur skolajiad roazhonat, "Souleymane" ha da vezañ bet anvet anezhañ "Vladimir", evel Vladimir Poutine divalav.

Oberiantizoù Emglev an Tiegezhioù

Kenderc'hel a ra EAT gant e hent daoust da zinerzhadur an Emsav dre vras hag d'ar re nebeut a izili oberiant. E gwirionez, evit forzh peseurt tachenn-oberiañ, e c'hell pep hini en em harpañ war framm E.A.T. ma kar : ur seurt "Herberc'hti a Vro Spagn" eo. A-gevret war-zu ar pal e stourmomp "war bep dachenn", evel ma lavare Anjela Duval.

Lec'hienn EAT : Abaoe miz meurzh ez eus bet embannet dreist-holl pennadoù o tennañ da vanifestadeg ar 24 a viz Meurzh e Pariz evit ar Briedelezh naturel, ha manifestadegoù lec'hel bihan. Mat eo bet degemeret dre vras ar fed ma welent brezhonegerion o vanifestiñ en o yezh. Meur a wech e oa bet klevet zoken "Gourc'hemenoù d'ar Vretoned. Distro eo ar Chouaned !" E Gwened e oa un hirvanniel war ar ramparzhioù "*Mariage Breizh = Père + Mère*" saludet gant aozerion ur gouel gant 1400 dañser hengounel ; en Oriant ez eus bet aozet un eured faos o tiskouez an hirvanniel brezhonek "*PMA GPA ur bugel n'eo ket ur c'hoariell*" en doa servijet dija e Pariz ; en Naoned e oa ur gwenn-ha-du da lakaat an hu war ur gazetennerez LBTG arloupet. E Roazhon eo bet krouet ur bajenn facebook "Le Printemps français Rennes **Roazhon**"...

Embannet hon eus a-hent-all war hol lec'hienn renabloù arbennik evit adkavout pennadoù a-bouez, bet savet peurliesañ gant Maodez Glanndour e "**Studi hag Ober**", "**Unvaniezh Speredel Breizh**", "**Ar Bdenn evit ar Vro**", ha dreist-holl rummad nevez "**Studi hag Ober**". Seurt renabloù hon eus savet endeo evit **Imbourc'h** ha **Kannadig Imbourc'h** hag e welomp eo krog an dud da implij ar fichennaouegoù-se da adkavout testennoù strewet dre ar c'helaouennoù hep na oufed pelec'h o adkavout.

Un nebeut pennadoù a zo bet embannet war al lec'hienn da heul emdennadur Benead XVI hag anvdigezh ar pab Frañsez. Prederadennoù Paol Kalvez hag an niv. 79 a zo en linenn ivez.

Klask a reomp bepred kenlabourerion da vouetañ hol lec'hienn ha da ginnig obererezhioù a bep seurt d'an dud. Evit-se eo bet digoret rubrikennoù nevez a c'hortoz kenlabour an holl da vezañ kresket an danvez hag an niver anezho tamm-ha-tamm :

daveennoù talvoudus ha dielloù evit "Studi ar yezh", kuzulioù evit "Sevel tiegezh e brezhoneg", "Korn ar vugale", e-kichen rubrikennoù a ya mat en-dro bremañ evel "Brezhonegeniliz -roll an Oferennoù".

War-raok ez a ivez dousik "Bodad ar Bibl Santel" : en linenn emañ ar Profed bihan Zakaria hag an unnek profed bihan all. Aet eo mat war-raok Jeremia Krennlavarioù ha Klemmvanou. Kenderc'hel a ra trede levrenn Liderezh an eurioù da greskiñ gant ar bajenn 330, troet pajenn ha pajenn diouzh an embannadur latin.

Pajenn Facebook "Kannadig Imbourc'h" : Kuit da gaout breutadegoù diziwezh hon eus kavet fur serriñ anezhi. Memestra e vefe mat kaout ur blog brezhonek digor d'an holl dud a youl vat evit gellout eskemm war gement danvez a zo e brezhoneg. Piv a raio ?

Stal Imbourc'h : Gant Kêr Vreizh Pariz eo bet prenet holl embannadurioù EAT-Imbourc'h hag ez eus tu bremañ da amprestiñ hon embannadurioù diganti. "Da sikour brudañ skridoù Youenn Olier" eo bet graet ganti ar brenadenn-se. Goulenn a reomp ouzh pep hini gwiriekat mat e zastumadenn eus Imbourc'h ivez, oc'h en em harpañ war ar fichennaoueg a zo en linenn : o sikour a raimp d'he c'hlokaat gwellañ ma c'hellimp.

Pirc'hirinded an Dro Vreizh : evit kejañ gant izili EAT ha brezhonegerion gristen all eo mat kemer perzh en dro-Vreizh (ar bloaz-mañ Sant Malou-Dol-Dinan), hag e oferenoù brezhonek pardonioù an hañv. Enskrivadur : 02.98.69.11.80.

Errata : ur fazi a zo bet graet ganeomp en Kannadig 79 : al luc'hskeudenn bet lakaet evit ar pennad "**An Tiegezhioù bihan**", ne oa ket hini an tiegezh Rothschild, hogen hini an tiegezh Rochefeller.

Trugarez vras d'ar re o deus kaset o skodenn evit 2013 ha d'ar re o deus prenet romant Youenn Olier "*Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue*", d'ar re n'o deus ket graet c'hoazh na zisoñjit ket, skodenn 2013 : 15 € (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Trugarez deoc'h en a-raok !

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir daresev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr, pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X